

I V A R H

E 2020 e em bod pemp soner ampart, kurius, karget a herder hag a sonjoù, tro dro kanennoù hengounel ha tonioù a nevez savet a-benn krouiñ ar strollad Ivarh.



Elouan LE SAUZE
Poz-aouer ha kaner

Ewen COURIAUT
Soner saksofon

Benjamin BESSÉ
Guitarour ha klaouierer

Thomas BESSÉ
Tabouliner

Pablo MOLARD
Son-aouer ha guitarour

TEULIAD KELAOUIÑ



PLADENN NEVEZ
Embann e miz Here

Distribuiñ
ar bladenn
coop-breizh.fr



An ergerzhourion sonerezh-se a gas da sonerezh Ivarh ho identitezh arzel dre ho egorioù don. Kinnig a reont ur sonerezh da selaou etre sonerezh hengounel ha rock inde.

*Disheñvel eo Ivarh doc'h ar perzh ho peus bet trop da glevet.
Pablo, Elouan, Thomas, Benjamin hag Ewen a mesk ar sonerzh kanet a Vreizh Izel da livioù nevez.*



TONIOÙ AR
BLADENN NEVEZ

Huñvre

1. AR ROUE STEVAN

Ar Roue Stevan a zo ur bazhvalan a lak ac'hanomp da soñjal àr hon bed a vremañ. Aozet eo an ton evit kas d'un daore trañs get implij ur c'horn boud bev, pezh a gas d'un sentiment mallusted.

An destenn a gont deomp emdroadur a bed en un doare ekologel, sokial ha kevredigezhel. Ar Roue Stevan a zo bet un diouganer a Vro Wened uhel en 18vet kantvet. Dre ha da geñver e profesioù emañ savet ha kompozet ar ganenn.

Chalus eo gwelet penaos emaint troet an diouganou-se da gwirion hiriv an deiz, èl a ma vehent bet tasmantoù kozh e reniñ ar bed.

Savet eo an ton diàr teir lodenn, èl a ma vehe bet savet evit ur c'honkour kouplad daou ha daou. Da getañ e c'hellet klevet an ton a boz, a raok ma troehe da gerzhet evit en em chañj en un ton andro. Àr an dañs e vez adkavet aozadur ur c'houplad bombard biniou etre ar c'han hag ar saksofon.

Testenn : Elouan Le Sauze, reve diouganou ar Roue Stevan

Sonaozadur : Pablo Molard

2. DISKAN AN IVARH

Dre ar ganenn mañ a glevoc'h istor un evnig a gan karnantez e bro hag e sevenadur er ur bourmen dre ivarhioù, parkoù ha flourennoù, lugernet get splander flour tarzigoù an deiz.

Skrivet eo bet an destenn mañ get Yannig Audran, bet siwazh davet an neñvioù. Kanet a sonet a vez ar ganenn mañ en e koun.

Testenn : Yannig Audran
Tonioù hengounel
Sonaozadur : Pablo Molard
& Elouan Le Sauze



3. AR VUGULEZ

Diaz an ton a vez kaset get klaouier psike Benjamin. Ar vugulez a zo un ton awenet get livioù ha tommder an heol. Daoust da se, e vez kontet istorioù kalon ar yaouankiz, lec'h ma vez komz a karantez hag a jalousi. Ar ganenn mañ a zo bet kanet get Eleonore Le Provost, kanerez mil anavet a Vaod.

Testenn ha ton hengounel
Sonaozadur : Pablo Molard

4. KREIZ

Dre an ton mañ eh oc'h pedet da gantreal dre minojennoù ar c'heiz Breizh. C'hwi c'helay klevet un ton a boz a vro fisel heuliet get tonioù gavot, plinn ha fisel. Mesket a vez ar ritmoù, an tonioù hag an dañsoù.

Kontet a vez istor ar plac'h inferniet, testenn mil anavet e bed ar c'han ha diskan. Ar c'hatabaz karantezus-se a gont un istor tost doc'h mojenn Orfe hag Euridis.

Testenn ha tonioù hengounel,
estroc'h evit tonioù gavot ha fisel kentañ bet
savet da Pablo Molard
Sonaozadur : Pablo Molard
& Elouan Le Sauze



5. HUÑVRE

Setu titr ar ganenn bet implijet evit roiñ anv d'ar bladenn. En ton mañ e vez beajet e bro an huñvreioù, en ur bed mogedet, etre menezioù hag islonkoù. Petra zo gwir ? Petra zo ijinet ? Skañv eo ar vevenn. Ha dont a rit da nijal ganeomp ?

Testenn : Elouan Le Sauze
Sonaozadur : Pablo Molard

6. LÂRIT-DIN

Da getañ eo bet savet an ton mañ get Pablo evit e gitar. Tamm ha tamm eo bet kempennet an ton evit ar strollad ha skrivet eo bet ar pozioù get Elouan. Evit ar bladenn emañ bet pedet Helène Labarrière get he gourebed.

Ar ganenn a zo ur sort disput etre un den hag un env. D'un tu e vez savet goulennoù get an den : Perak ho peus kuitaet ho pro ? Petra ho peus gwelet ?

Ha d'an tu rall e vez respontet get an env. Henezh en eus bet gwelet sotonioù ar bed ; tud, yezhoù ha sevenadurioù lazhet; penoas emañ saotret hon douar ha eneoù an dud. Emañ eñ e gortoz sioulder mab den evit beviñ en ur bed ijinet ha krouet get un env.

Testenn : Elouan Le Sauze
Sonaozadur : Pablo Molard



7. TUCHANT

Tuchant e erruay an hañv hag e kanay ar bobelan. Ar bobelan hag an eostig ar voualc'h argant an ouprig... Daet da lidin an hañv er meterier kinniget get ar strollad.

Daoust hag emañ an ton sonet buhan get ar sakofon a zeu da zirinkiñ gorregezh ar c'han ? Pe marse emañ ar c'han a zeu da sioulat ar sakofon ? Doc'hpenn e vez klevet ritmoù luziet ar batiri, goloet get teisadurioù gwriziennet get Benjamin. Tommder an hañv a vez santet er muzik.

An ton a zo unan hengounel a vro Poher, pand eo ar pozioù kentoc'h a vro wened.

Testenn ha ton kanet hengounel
Sonaozadur : Pablo Molard

8. AR GALON DIGOR

Kaset eo ar sonerzh hag ar sonaozadur get ar guitar tredan 12 kerdin. Ergelc'h an ton a zo egoreg ha psikedeleg. Doug a ra istor ur plac'h, bet chanchet karantez, ha pa oe he zen e beajiñ. Klask a ra an den dont en dro en he c'halon met re ziwezhaat eo. C'hoarvez a ra gantañ evel gant un evn pelikan a zo digor e c'halon evit an holl er bed mañ, a zo digor he c'halon evit an holl laboused, ker kar a ra an holl, met n'eo ket karet get den.

An ton a zo bet klevet a lies mat e bro Poher.

Testenn ha ton kanet hengounel
Sonaozadur : Pablo Molard

9. A VEG DA VEG

Un deiz en ur porzh skol e oe daet ur skolaer davet ur skoliad evit golenn digantañ peseurt env a garehe bout. Ar c'houedur a respontas penaos a garehe bout un erer evit reniñ dre ar bed. Retornas a reas ar bugel ar goulenn d'e skolaer. Respont a reas en ur laret a garehe eñ bout un eostig, ker perak gouiet nijal pa n'heller ket kanal ?

Dre an istor gwirion-se eo bet awenet Elouan Le Sauze ha Youenn Lange evit skriviñ an destenn mañ. Enañ a gavec'h enkorfadennoù e laboused disheñvel. Ag ar sparfel betek ar vran en ur dremen dre an dront. Evit ur ganenn berr a walc'h eo bet choajet un ton bet kanet get Catherine Duro.

Ton kanet hengounel ha ton sonet bet savet get Pablo Molard
Testenn : Elouan Le Sauze
Sonaozadur : Pablo Molard



10. AR VEAJ

Pedet oc'h da veajiñ trema an neñvioù ur wech c'hoazh. Get ar veaj-se e c'hellet ober anaoudegezh get loened madelezes. Daet da bourmen àr hon ivarhiou.

Bet on bet
Bet on bet é pourmen
Bet on bet é pourmen, biskoazh n'on distroet

Testenn : Elouan Le Sauze
Sonaozadur : Pablo Molard



Prof a reont ar pemp arzour ur sell nevez àr ar sonerezh e Breizh en ur meskiñ hag en ur liammañ testennoù awenet get an hengoun da teisadurioù livet get sonioù nevez.

Deuit da zizoloiñ prepozoù arzel Ivarh. Luskellet get avelioù ha livioù daet a Rock ar blezadoù 90 pe ag an estren vro. Daet da vout lusket etre Breizh, ar Balkanioù pe ritmoù ar Maghreb.

Deiziataer

Distro skol

Kavet a vo ar bladenn e dibab Inies First
indiesfirst.fr/#references

D'an 02 betek ar 6/10

Amzer labour - Kreizenn sevenadurel An Athena en Ergue Vras

06 / 10

Embann ofisiel (pladennoù hag àr internet)

Arvest kentañ Huñvre Kreizenn sevenadurel An Athena en Ergue Vras

20 / 10

Arvest en Noktambül Roazhon

08 / 11

Festival Yaouank Roazhon

17 / 11

Arvest e Bonjour Minuit Saint-Brieuc

29 / 11

Festival No Border Kabared Vauban Brest



Pedet oc'h da zont da veajiñ ha da bourmen dre ivarhioù omp argoad. Diwallet memes tra doc'h krenadenoù douar kaset get ar startijenn hag ar mignoniezh.



TITOUROÙ AR BLADENN

Pablo Molard : Guitar

Benjamin Bessé : Guitar tredan 12 kerdin ha klaviour analogel

Elouan Le Sauze : Kan

Thomas Bessé : Taboulinoù

Ewen Couriaut : : Saksofon

Hélène Labarrière : Gourviolin war Lârit din

Stlak war g/Kreiz : Clément Duménil, Elouan, Pablo, Ben, Tom hag Ewen

Enrollet e WM studio e Brengoloù (22) gant Wilfried Lasbleiz

Enrolladenn gourviolin : Jacky Molard e Poulencerf (29)

Meskañ : Benjamin Bessé ha Pablo Molard e Cocoon studio e Gwern-Roazhon (35)

Mastering : Bruno Gruel - Elektra Mastering

Graferezh : Alice Duménil - Fizalis

Produiñ ha booking : Paker Prod – contact@pakerprod.bzh – www.pakerprod.bzh

I V A R H
HUÑVRE

**NOUVEL ALBUM
PLADENN NEVEZ**

**EN CONCERT
WAR AL LEURENN**

06.10 — ERGUÉ-GABÉRIC (29) - CENTRE CULTUREL L'ATHÉNA
20.10 — RENNES (35) - LE NOKTAMBÛL
08.11 — RENNES (35) - YAOUANK - LES CHAMPS LIBRES
17.11 — SAINT-BRIEUC (22) - BONJOUR MINUIT
29.11 — BREST (29) - NO BORDER - CABARET VAUBAN

BENJAMIN BESSÉ / THOMAS BESSÉ / ELOUAN LE SAUZE / EWEN COURIAUT / PABLO MOLARD

f **Instagram**
@lvarhofficial


MINISTÈRE DE LA CULTURE
cNM scpp SPEDIDAM PAKER GRANDE BOUTIQUE amzer névez L'Athéna ALBA coop breizh b




ALBA
l'agence



Titouroù ha goulennoù :
Leslie LE GAL


 06 58 30 18 04

 leslie@albalagence.com

 albalagence.com

PAKER
prod

 contact@pakerprod.bzh

 pakerprod.bzh



I V A R H  